

CHANSON AR FLACTIC PAOUR

Var ton Fantic Coant

Deiz mad dec'h, Fantic coant...
M-s peb s'chanch mant !
Diveza m ha quehs
E voa tres-q hoc h invis ;
Mes aboue, me gred,
Noc'h ens hi quet chanchet.

Joa vras a meus onzoe'h
C'hoas eñ bije muioc'h
Ma vije ho quenet
Eñ ne-bent decoret
Deus a netadorez ...
Pard mui, va mestrez.

Na ellan quet credi
E ve dre zeigi,
Q-n neubent supposi
A ve dre loustoni
O cuelan, plac'h yaouanq
En bo lurgerie foug.

Anzavit din hep mez.
D'arez ha tiegez.
Paourante zo calt
Mez n'en d o quet pec'het
Lavarit din heb aon
Ha c'houa vanq a zaon.

Autron, e ty va nan
Na g'let quet un tam
Nac ar hant da breñan
An dra-se zo g'ass ;
Evel-se n'en dou quet
Da veza linalet

Ne ve cavet em zy
Nemet teir scudel bri
Teir loa goad, eu hodez,
Ur podic dae g'asq lez,
Dion scan m'aboues,
Ur banq hac eur guele,

Cavet a be nuspenn
Un tamic chaoudouren,
Ur gos cramañteren,
Tiebez, pilic, pladen,
Evit oza crampoiez,
Mes nonpas alies.

C'hoas eur c'hriminiou mad,
Pa ve lin da gribat,
Daou gar evit neza,
Travouil da zibona,
Tamouez da oza bleud,
Pa vez guerzet an neud,

N'on deus quet pemq gues
Da g'out eñ tam blonec
Nac eñ doroad olen
Da zalan ar zouben
Hac evit ober tan
Hlon ens eur gorgic lann

Cetur aze, autron,
D'ant'or vi guirion ;
N'en eus quet er c'hontre
Ur plac'h q n paour ha me ;
Mar clasqat ar m'adou
Chenchit tu d ho pajou.

Var gement-se, Fantic,
N'en n'och quet p'avidie ?
Mes ho com o guirion
A ravis va c'halon ;
Soulvi r, a ha elévan,
Soulvi oc'h ho caran.

Me zo eur nare'hadour
Dre zoun ar dre zour ;
Me meus aour hac arc'hant
Ha demeurans charmant,
G'uit zourcis vras meblet,
D'ho rece, pa guesfet.

Tri pe bévar bloas so
E valean dre ar vro
Eñt clasq eur priet,
H n em meus quet cavet
Ini d'am za m'ant
Nemerdoc'h, plac'h prudañt.

Lavarit d'in eta
Ha me a die conta
D'g'out ac'bijadour,
Dre voneur dreist m'ur
D'ho quelet oc'h orni
Dre ho quenet va zy ?

Mar be contar va man,
Me na zifferui tam,
Dre voneur carante
Demp hon daou he bete ;
Va c'halon zo mantret
Mar bec'h disconviat.

Deiz mad, greg enorus,
Mam vad tu hac eurus ;
Mam d'eur vec'h enorabl,
Caër modest, agréabl,
Am bo evit bried
Ma n'am refusi quet

Birviquen ne gredan
Autron vec'h dent amañ
Eñt ober goul n
Demeus eur vergeren
A b b tra dibourve,
S pet ar burete.

Sellit en piz castel
E chom an dimezel
Gueht ev peb costez
Ar brasan pa urantez
Eñt eo tisrei
Deuz en nep fantazi

Mam, ens ho tiegez
Em eus anaoudegez ;
Var gement-se t'omp ;
Hon tri en em gl'fomp
Da vevan en honnéstis
Dre va finvidiguez.

Au'rou na d'ean get
Refusi ho reget,
Dre ha tisinter s
Er choas eus eur vestrez
E zoun zur a reñfet
Eureuz ma merc'h caret.

Dre o friedelez
Eureuz voent assemblez ;
Douder ha yaouanquis,
A zo guell avichou
Eguet an olt vadou.

CONCLUSION

Dre r zon-mañ è veler,
Var ar mez hac en quer,
E zeo ar barfete,
A blich mui d'ar voarsel,
Rac-se, merc'het ar vro,
Bezit modest ato,
Hac e cavet priet,
Evel ma tezired.

FIN.

CHANSON NEVEZ

Composet gant ar Cloarec, evit disquez ar vantr-calon en eus santet eus a zemezi e Vestrez.

Var ton : *Malg' d'haute et tendresse.*

Pebes qelou, o, va Doue,
A meus hirie recevet !
Va mestrezic, va c'harante
A glevan so d-meset ;
Va mestrezic, va c'harente ;
An hini gatrien muia,
Ha pa sonjan en queiment-se,
Va c'halon a ven ranua.

Oll blijaduron an natur
A so achu evidon ;
Achu e se ar blijadur
A davee va c'halon ;
Achu e ar gontantamant
Am boe ebars er bed-man ;
Fœd d'an aoar ha f. d'an arc'hant
Eneb guis n'o desiran.

Me a garfe caout eur matier
A guement a ve capabl
Da renta va c'halon seder.
Da sec'hi va daoulagad,
Da rejouissa va c'halon,
Da gontenti va speret,
D'am lemel a affliction
Ha da rei din ar yec'het.

Mes queiment-se so incredabl,
Ha ne arruo biquen ;
Me so muia miserabl
Eus an oll grouadurien,
A meus colet en un instant
Ar froues eus a beimp blavës,
En un gol va c'hontantamant,
Va flijadur, va mestres.

Adieu eta p'rous Plestin !
Adieu tud ar gonnequang ;
Me a meus cavet va c' agrin
E mesq ho rejouissang ;
Me meus ho c'heuilien gant douster,
Me ho quita gant glachar,
Henvel dimeus eun dursunel
A ve privet eus e far.

C'houi hoc'h eus gret va flijadur,
Va joa, va c'hontantamant ;
C'houi a ra va displijadur,
Va anquen, va nec'hamant ;
E mesq ar ros a ambrassen
Ha va oll d'lection
Me a meus cavet un dressem
Hac a biq'cals va c'halon.

Mes breman me gred en guirion
Reson an dud babilla,
Penos e hell'ar caout poë on
E mesq ar suc an doussa ;
Ha dindan ar flurion caëra
Alies e vo co chet
Aspicon ar re gruella,
Aëret-guiber, serpentet.

Rac se eta, me ho suppli,
Ia, dre ma ho caran,
Na deut james da reposi
Eler'h a vefet bravan ;
Rac ma c'heru eneb goaleur
Da ober dec'h diblassa,
E veso tristoc'h ho malheur
Ha diessoc'h da usa.

Evit test eus a guement-se,
Va breudeur, ma c'hoareset,
C'houi pere am anvese,
N'oc'h eus met dont d'am guelel,
Ha pa velfet ar chenchamant
Pini a so d'ut ennon
C'houi a brouev certainamant
E se touchet va c'halon.

Diaroq me a voa envel
Eus e r rosen florissant ;
Va c'halonnir bepred seder,
Carguet a gontantamant ;
Ar joa piut-t var va diou chot,
Va daoulagat q'er laouen,
Ma sonjen, dre ma voen diot,
N'am blije glac'har biquen.

Hoguen, ma em guelfec'h breman
Ehars em daelou beus-t,
C'houi lavarie : ne quet eman
Hon boamb-ni anaveset,
Ennes a voa guye e galon ;
Eman a so comristet,
Ennes a voa un den mignon,
Hac eman sur n'en deo qet

Allas ! eo sur, va mignonet,
Me so ar memes ini
Mes biscoas ne gavis sujet
Voe capabl d'am glac'hari ;
Breman me meus cavet unan
Hic a glac'har va c'halon !
Ha pa vo clevet anean,
Ec'h estenfet gant reson.

Pa voan me ebars em jardin
O contempli va flurion.
Va c'halon, exant a chagrin
Va daoulagad a saërou,
Ha me clevet un alc'hoëler,
A us va fen o cana
Ad studium te confer (1)
Nam nubla est amica,

Ha me o vonet d'am godel ;
O tenna ma fistolen,
Hac ho tiscar an alc'hoëler
D'an traou dimeus ar vesen,
Rac gollo velse o buë
Qement en deo ar galon
Da sonet da annonç diu-me
Ar sort desolation.

Mes p'e glevit u qement-man
Ac'hinou eur messajer.
Otramant, clevet anean
Eus a veg un alc'hoëler,
Oblijet on bet d'e glevet
Ebars em brassa glac'har,
Ha setu ase ar sujet
Ma tesiran an douar.

Neus mui a gonsolation
Evidon bars er bed-ma,
Neus nemet desolation,
Tourmanchon ar re vrassa.

A ve reservet evidon
Goude bea re garet,
Mes me vo furroc'h da virquen
Ha ne garin den ebet.

P'am eur fraillet ar chadenon
Gant pere oan amaret,
Pa meus brasunet al lassou
Gant pere vont liamet ;
Pa e demeset va mestres,
Me guemero an h'bit,
Ha me ne vesan racoles,
erten me a vo hermit

C'Mes gouscoude, p'n em sonjan
Ha pa ran r'f'xion,
Ur recola a brusn' goela
Ha dere'het trist e galon ;
Un hermit beva retirat
Hac ep nep plijadures,
Qement-se oll so re galot :
Ret e din c'hoas eur vestres,

M s pelec'h caout eur guir vestres
Ar bed-man a so malin,
N'am eus q'et esom danseres,
Nac unan a garo guin ;
Diaroq me voa difinil.
Mes breman pa on trompet
Me a v'zo muidoc'h subil
Pa g'conversin gant merc'het.

Mes anaout ran eur feumulen
So dign a attention,
Onnes a vo da virvijen
Reuannes eus va c'halon
En onnes e ma va f'ing,
Onnes e va c'harenie,
Enni e man va esperang ;
Hi e sourceen va buë.

Evelse un den glacharet,
Evit en em gonsoli
A die alies lavaret
Da bassest e annui :
Mar deo serrat an nor-se,
Uan al a sig'ro.
Me a vo bedred er sonj-se,
Hac a vo betec ar maro.

Ma tesirfac'h ma mign'net
Gout hano ar c'homposer
Guinidic e a Locquirec,
Mab ena i'eur guader,
A so n'em lajet er studi
Bars er gær a Vontro-lez,
Hac a so breman disou d'e,
P'e dimezet e vestres,

Evit soulaji ar c'haner,
M'o suppli, assist'ntet,
Da rei desin pep e siner,
Evit eva d'ho yec'het,
Otramant, prenit ar chanson,
Pini ho deus ar pour
Da rejouissa ar galon
A greis ma vo en glac'har.

(1) Da lavaret e, en em ro d'ar studi, da vestres so dimezet.